

Stevan Kerhoret (Le Strat Etienne : Pluniav
1865 - Pluniav 1954)

Bet embannet e 1902, e gwenedeg. Modernanet eo bet
an doare-skriva.

Taolenn

Penaoz gober eid choej ur pried
En amzer a groedur e Breh.

Penaoz gober eid choej ur pried

Pe vo me choñj-me diméein (*teir gwech*)

M'em-bo ur verh e blijou dein.

Ne sellein ket don en dané

Na memb rei doh er vraùité.

Dané ne ra ket eurusted

Braùité 'bas avel moped.

Ur plah yaouank e chojein-me

Etré huigent ha tregont vlé.

Eid houyou kondui tiegeh

Deurad er seut, gober krampoueh.

Ha n'em-bo ket un damezell

E saù he fenn skañv en aùel.

Mez ur verh fur ha pozet mad

E oer deval he deulagad.

N'em-bo ketr hoah ur plah diêz

Hga a weler mohet liez.

Ged ur vestrez a fall imur

Penaoz em-bo-me plijadur ?

Ur verhig dous ha klouar perped,

Honneh 'vo me fried karet.

Pa dein-me de choej ur pried

D'emenn e vo red dein moned ?

Hag eañ e vo d'en tavarneu

D'er foerieu ha d'er pardonieu ?

Nepas ; er merhied avizet,

Er lehieu-se n'o haver ket.

Merhied e glask reded perped,

Me 'lar-me, n'o-des ket spered.

Ne dint 'meid penneu aùelet

Anehe me ne vennan ket.

Gùel e' genein ur plah divlamm

E chom er gêr e-tal he mamm.

Ur plah e vo gwelet dalhmad
Ag er mintin e labourad.

E vo kavet d'er sul er gêr,
Devod e lared he rozer.

Pe gouehein àr er plahig-se
Me laro trugare de Zoué.

Ha geti me viùo hemb gloez
En ur hortoz er Baradoez.

En amzer a groedur e Breh

Liez-seit e choñjan
En amzer-hont tremenet
Ha pe 'oen-me bihan
Er penhêr¹ ma on ganet !
Amzer bourruz, amzer vad !
Me 'choñj ennoh bamde.
Pe 'oen er gêr ged me zad
Nag euruz e oen-me !

Me 'lare me fedenn
Dirqag limaj er Huerhiez ;
Me 'yee d'en overenn
D'en iliz a me farrez.
Euruz om-ni Bretoned !
Ag en oed tenerrañ
Lakeit om bet de selled
Trema bro gaer en Ean !

Kaset 'oen bet d'er skol
Avedi deskein er galleg,
En drespel d'er "simbol"
Komzein e rein Brehoneg.
O ! lavar kaer a me bro,
Me ven ho kouarn perped
Hag ho streüein tro-ho-tro
En pevar horn ag er bed.

Pe oe yen er gouhian
Chouket e korn en uled
Me duemme doh en tan
Me deuorn ha me deu droed
Bleuein e hre me halon
Sel gweh el ma tanhouen
Kesten grillet er balon,
Ha chistr dous er huerenn.

Ged en amzer neüe
Pe oe glaseet er mêzeu
Liez e lein er gwe'
Me yee de glask nehiadeu.
El un estig àr er barr
Hemn arsaù e kanen
Hag en dasson er hoed klouar
E lare me sonenn.

En amzer ag an hañ'
Pe yen d'er prad de fpennad
Evel er re vrasañ

¹ penhêr : penn-kêr.

Me 'saùe foenn a-forhad.
D'en est idan en tuemnder
Plijet-braz e hree dein
Moned d'er park divañch-kaer
Eid sekour indrammein.

A garradeu d'er gêr
Pe oe tolpet er blead,
E tornein àr er lèr
Me 'gave hoah bourruz-mad
En taoleu freill gweh-d'er-gweh
Ar er plouz e houehe,
Hag en devalenn a-beh
Sel taol e reskonde.

Pe oe hejet eùé
En aveleu hag er per,
Moned e hreen ged joe
D'o cherrein en ur baner.
Goude ma oent estet mad
Er velin o male,
Hag a bep tu d'er masad
Er chistr dous e rede.

Bretoned, me breuder,
Chomet fidel d'on kizieu ;
Goarnet er lavar kêr
En-des komzet on tadeu.
Beùet el gwir Vretoned
Ataù greduz er fe',
Hag euruz el e vehet
Er Baraouiz un de'.